


AN DISTRO


Kinniget da Evnik Arvor.




Mi-gnon, nag eo dous an dis-




tro! O nag eo dous 'Vit ar




Breizad diz-rei d'e vro, D'e di di-



drouz: Bet eo a bell war ar mor



don E-touez es-tren. Meur wech



'neuz son - - - jet 'n e ga-



lon n'o gwelje ken.

Mignon, nag e dous an distro !

O nag e dous

'Vit ar Breizad dizrei d'e vro,

D'e di didrouz :

Bet e a bell war ar mor don,
E-touez estren,
Meur wech 'neuz-sonjet 'n e galon
N'o gwelje ken !

Breman setu fin-d'an anken,
D'ar sonjo fall ;
Ar joa a lak banno laouen
En-dro d'e dal.

Nag e kaer an oabl da welet !
Flour ar mezio !
Nag e dous kán al lapoused
'Touez an delio !

Pep tra a c'hoarz outan fete :
Ar vleuennik,
An heol skedus deus lein an Nè
Hag ar wazik.

Eur c'hloc'hik a glev o tintan
'Bars ar pellder,
Hag e youez dous a lar d'ean :
« Deuz prim d'ar gèr ! »

O de a levenez dispar !
De binniget !
Gwelet 'ra ar c'hornik douar
'Lec'h e ganet.

Gwelet 'ra breman dor e di...

Deus e lochen

En eur lampad e teu e gi

D'e diarbenn.

— « Hanta Loullik ! kollet on bet

'Pad pell amzer !

'Mechans e tisplij d'id bepred

Mesa ar gèr ?

« 'Vit an deio 'c'h efomp hon daou,

'Vel warlene,

Da redek a-dreuz d'ar c'hoajaou,

E-pad an-dè. »

An oll a deu war doull an nor

Ouz e glevet ;

Hag an divrec'h a zo digor,

Daero a red...

Daero dous int, daero a joa...

Anken 'n e vouez,

Hen a lavar : « Med piou, eta,

A vank 'n hon zouez ?... »

Allaz ! peb joa grenv, a welan,

A ve mesket :

'N hini 'oa bue an ti-man

A zo kollet ! »

LAOTIK.